

PEDEN
 DA ZANT CORENTIN

DISKAN :

Sant Corentin, Patron Kerne,
 Diouallit mad hor bro ;
 Grit ma virimp lezen Doue
 Beteg heur ar maro.

1.

C'hui zo breman gant ann Elez,
 Skedus ho kurunen ;
 Ni zo er brezel didruez,
 Er boan hag en anken !

2.

Euz ann Ifern eo deuet Satan
 Evit mouga hor feiz ;
 Teurel a ra moked ha tan
 E peb korn euz a Vreiz.

3.

Ann dud n'ho doa ket kaloun gre
 A zo dija d'ann traon ;
 Mil ha mil all gonezo ive
 Ha kreski rai hor c'haon.

4.

Ar groaz, ann ilis, ann aoter
A gren beteg koueza ;
Ma pad re-bell ar bar-amzer,
Setu kollet peb tra.

5.

E Kerne, menez ha traonien
Zo deoc'h a berz Doue ;
Glepet int bet gant ho c'houezen
Dalc'hit stard d'ho leve.

6.

Ho preac'h santel zo dizec'het
Mes bepret eo nerzuz ;
Dirazhi e ranko tec'het
Enebourien Jesus.

7.

Doue da dad, c'hui da Batron,
Barados d'ho ene,
Mari da vamm ha da itron,
Setu c'hoant tud Kerne.

Quimper, le 9 Novembre 1886,

PERMIS D'IMPRIMER :

SERRÉ, *Vic. gén.*